



CHANSON NEVEZ,  
VAR SUJET AN EFERIEN.

455 A  
a/

**T**Ostait d'amselaou, c'houi, mignonet Bachus,  
Ha me a zisco dec'h an etat danjerus  
A zo o re henti an hostaliriou  
An deveziou pemdez, ar zul hac ar goueliou.

Divarnon va-unan e teuàn da juji  
Peguen riscus e zco dont da da abandoni  
Ar c'horf hac ar madou, alies ar vue,  
Da zerc'hel hostisien en o frosperite.

An nep a ve goasqet, nemet diavis ve,  
A dle gout en pezhent e chom ar virione;  
Pa meus douguet ar bec'h ha poezet anezàn,  
E tleàn gout ive pe boez a zo ennàn.

Bet a meus ur guentel hac a zisq bremâ din,  
Pa deuàn d'e c'hompren ha d'e c'honsiderin:  
Discoelet e deus din eo mat delc'hel rêson,  
Evit nep abundanç caout moderation.

Ah! petra laràn-me? caout moderation  
A zo un dra boannius, pa zezir ar galon;

Mes gouscoude ê goel combati ar panchant,  
Eguet ne dè beva evel un insolant.

Sourcen an oll viçou partout a meus clasque  
Hac-ebars er boesson e meus-y rancontret;  
Me a deu d'e guervel mam ar fallagriez,  
A laca an dizurs e kêr ha var ar mêz.

Te a c'heus goneet calz eus a galonou,  
Ha laqet chenchamant en nombr a diadou,  
Ha d'an oll viçou all e telc'hes dôr digor,  
Dre eno calz a dud o deus collet o enor.

Mes ar pez a so voas ebars en pep canton,  
An nep a ve troet gant dizurs ar boesson  
A dacho da zistrêi ar re all evelte,  
Evit mont assambles da offanci Doue.

Mont a rer a vanden, hep eston na true,  
Da zistruja ar c'horf, da vlessa an ene;  
Var digare laqat an tan var ar c'herniou  
E teuer da c'houlen guin eus a bodadou.

Un darn demeus anê, e fin o boutaillad,  
A lavaro neuze : poent ê demp-ni quittât.  
Nan, nan, eme darn all; pa zomp en hostalin,  
Ha p'è tommet ar forn, e vo ret e c'hôri.

Neuze e vo clêvet ur garnach, ur brezel;  
Mar be den rêsonabl, vo forcet da devel :  
Ar vertus, ar bon sans a rentç coll o droajou,

Eno neus da veuli nemert ar sottizou.

Entre m'ho po arc'hant e vezot servichet,  
 Ha pa vec'h ous an dol dre o coublou semplet,  
 Mar gallit discoel e'hoas arc'hant ur chopinat,  
 C'houi a vo sicouret da sevel var ho troad.

Bezâ so hac a gred demeus an eferrien  
 Eo oblijet an ên da blega d'o lezen;  
 E tle an douar crena o clêvet o c'homizou,  
 Ar môr en o lavar ober *tre* ha *lano*.

Mes chenchit a vuez hac a sonjesonou,  
 Ar blijadur ne man get ebars hent ar viçou;  
 Mar c'heullit ar boesson, an deboch, an ebat,  
 E santfot ordinal un dra ous ho piçat.

Ho conscianç a vo hac en deiz hac en nos  
 O clasq e chenchamant hac o c'houlen repos;  
 Roit dei he mennat ha chenchit hep appel,  
 Hirroc'h vo ho puez, hoc'h ene a vo voell.

Arrelit ur moment da sellet ouz ar bed,  
 Hac e velfot varni calz a dud ruinet;  
 O re henti ar boesson ha compagneuz fall,  
 Eus forcet, hep fusuill, uu nombr da chasséal.

Pa vezot oc'h eva, e velfot filoutet  
 Oc'h ober an dro d'ec'h, hac int oll o laret:  
 Ho famill en antier a zo a galite,  
 Tud a fêçon int tout, c'houi zo den brao ive.

N'hon eus ezom da c'hout mat hon ano bade,  
 A rest a ouzomp tout deus eclat ho ligne,  
 A so dre oll meulet, caret e peb contre,  
 Ha c'houi oc'h eus patant an ær demeus ane.

Mar bec'h en ho coase e safot en ho sa :  
 Allon ta, hostizes, amàn guin ha bara ;  
 Mes e fin ar regal ar re-màn ya n'o rout,  
 Hac ar scoden so grêt a goe en ho cont tout.

Ha c'houi no po evet nemet ur voutaillad,  
 O pezo da bêa marteze dec podad ;  
 Mes ma visac'h er guêr, c'houi a ve calz furoc'h,  
 Neuze ne bêfac'h qet ober goab ac'hanoc'h.

Eur veach ha mo po implijet ho madou,  
 Ho prassa mignonet qenta ho tilezo ;  
 Mar gueont ho pete vo gant ur pas gorrec :  
 Da goad ar baourente ne yêr qet o redec.

Mes ne c'hortozit qet ar bed oll da laret  
 E vo ur vuez fall au hini a heuillet ;  
 Camaradet ho po, hervez ho fantasi :  
 Ne zeus qet a viçou n'o deus tud d'o meuli.

Ne gredit qet e ve ar bed oll drouc-contant  
 O velet ac'hanoc'h o tispign hoc'h arc'hant :  
 Pa vez unan o coll, eguile a c'hone,  
 Rac ral e'r maleuriou n'eus profit aneze.

Oll yaouanqis va bro, ebars en honestis

En em darempredit goude fin an Ofiç ,  
 Ha lezit ar boesson da guemer e repos ,  
 Rac eus a vil maleur e zeo én ar pen-cos.

Ha c'houi, tud ancien, demezet ha da zemezi,  
 N'en em antêtit qet gant an hostaliri ;  
 Ne deuit qet da vaga ar viç-se en ho calon :  
 Ar peoc'h ne chom qet pell etoues re a voesson.

Eur merq a union entre ar vignonet,  
 Eo eva ur bannac'h hep beza direglet :  
 Grit usach vad gantàn bars en compagnunez,  
 Mes tachit da viret ar rêson vit mestres.

Pa zo deut guin er vro eb deut evit eva,  
 Mes nê qet a urz vad n'em ruina gantâ ;  
 Rac goude re a cher ec'h arru *Paourente* ,  
 Na ve qet e-uan, *Qerse* a deu ive.


Cetu amâ bremâ ar fin eus va c'hentel :  
 Heuillit-hi avichou , ha lest tizan Bourdel ;  
 Moderi a lerer a so mat vit nep fest ,  
 Consultit ar rêson , hi laro dêc'h ar rest.

Mes bremâ, va Chanson, p'è guir oc'h finisset,  
 Sinet eo ho pass-port : it elec'h mar qeret ;  
 Ha mar bec'h attaqet neus fors bars e pez bro,  
 Retornit var ho qiz, va merc'h m'oc'h anzavo.

E zàn d'oc'h instrui aroc ma partifet :  
 Ne zonjit qet e vec'h gant an oll dud meulet ,

Rac qen ral ê guelet c'hoant an oll ebars er vro,  
Ha m'e guelet an urz vat en hostaliriou.

F I N.



ERUSTET PAUTR AR GUIN.

Var ton : *Ma Commère, quand je danse.*

**T**RI zraic ordinalamant

A glasqer da bossedi :

Eur vreguic coant, guin hac arc'hant,

M'em bez re ganto oïzri.

Bo, bo tud gourmand, *bis.*

Eo ar seurt-se; eo ar seurt-se;

Bo, bo tud gourmand, *bis.*

Guell eo guin eguet arc'hant.

Eur vreg e penn ho-tieguéz

A rai deoc'h mœur a chagrin;

Foei var ur seurt marc'hadourez;

Guell eo calz ur banne guin.

Bo, bo tud dallet *bis.*

7  
Eo ar seurt-se , eo ar seurt-se ;  
Bo , bo , tud dallet , *bis.*  
Guëll eo guin eguet merc'het.

Ne c'houzanvàn qet a arc'hant  
Da louëda bars em godel ;  
An hostizien comunamant  
Anezàn tout a zo vell.  
Bo , bo , tudou chin , *bis.*  
Grit eveldòn , grit eveldòn ;  
Bo , bo , tudou chin , *bis.*  
Guëll eo calz ur banne guin.

C'houi gant merc'het , c'houi gant arc'hant ,  
A zonch beza dizoursi ;  
Me , gant guin , a zo paotr contant ,  
Hac en ev betec al li.  
Bo , bo , tudou chin , *bis.*  
Grit eveldòn , grit eveldòn ;  
Bo , bo , tudou chin , *bis.*  
Ne zeus par d'ur banne guin.

Evit va renta-me laouen ,  
Digassit din boutaillad ;  
Ne mon qet e chal gant moyen ,  
Nemet em bezo guin mad.  
Bo , bo , tudou chin , *bis.*  
Grit eveldòn , grit eveldòn ;

Bo, bo, tudou chin,  
Ne zeus par d'eur banne guïn.

*bis.*

Va oll chagriaou a veuzàn,  
P'em bez diouc'h va zec'het;  
Gant netra nec'het ne vezàn,  
Eur vech ma vez din tommet.

Bo, bo, tudou chin,  
Grit eveldòn, grit eveldòn;

*bis.*

Bo, bo, tudou chin,  
Ne zeus par d'ur banne guïn.

*bis.*

FIN.




---

E Montroulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Yur.